

- Page 1 Refrain : O itron-Baria Glerin
Biniget ho Pugale
'Zo dirakoc'h war o daoulin : Ho nerzet korf hag ine .
- 1-En Zant Kleve, pa oan bugel, Ma mamm 'lare d'in gwechal
Aman dam-dost en eur chapel ,
En Klerin 'p'eus eur vamm all .
- 2-Eur vamm galloudus ha dispar, 'Vel neblec'h na n'eus
hini. Rouanez an new an douar :
Bez fur, ganin 'c'hi d'he-zi .
- 3-Oh ! nag a c'hoant 'ma d'ho kwelet ! Lakis ma foan
da ziski, Ha warlerc'h ma mamm da laret :
Rez : me ho salud Mari !
- 4-Gwerc'hez, n'ho chapel gaer Klerin
P'ho kwelis er wech kentan, Ma c'halonik 'dride lirzin
En ti ma mamm 'oan breman .
- 5-Ia ! zantout 'ris e oan er ger, En ti 'zavas ma zado
Da vamm Doue, d'ho mamm dener
En eur lec'h sioul ha distro .
- 6-Eno e plije d'he pedi, Eno, plije d'ar Werc'hez
Digemad mad kement hini
'Lake fe n'he madelez .
- 7-Neuze ma c'halon 'oa dinam, Allas, aboe, O Mari !
E m'eus glazet kalon ma mamm,
Kalon ma mamm, hoc'h hini !
- 8-Mez pa ve klanv fall he bugel, Ar vamm outan 'neus
true ; ha kaër 'ma klask ouzoc'h mont pell
Mamm , ho kalon am 'heuille .
- 9-Ma m'eus troët keign d'ar pec'het, Mar gon ho pugel
arre ; C'houi 'oar, Gwerc'hez, piou 'n'eus roët
Zikour ha nerz d'am ine .
- 10-Nag a dud 'veldon 'p'eus gwelet, Eus a dost , lies a
bel, A gorf, a galon gouliet , Eus ho treid, en ho
chapel .
- 11-Ha, 'n'eus hini, o mamm dener, Na n'eus ho pedet
gant fe, Na distroje sakanvoc'h d'ar ger ,
Wel a gorf, wel a ine .
- 18-Nag a vruzud aboë 'd'eus gret, 'Wit diskouë he
madelez ; Nag a dud a zo bet pareet
Gant dour feuteun ar Werc'hez .

- 19-'Vel thi, an Otro Zant Kado, Wella andud gouliet ;
Zant Anton, Zant Eler a ro
Ho bennoz 'war al loened .
- 20-Zant Blaiz zo goude ar Werc'hez, Ar Zant brudet
er vro man ; Rak gwellañ ra eus en arwez
Nep c'houll skwazel digant-han .
- 21-An neb a bleg dindan ar bec'h Pa bedo ar
verzerien, 'Neus bet 'veltan trubuilh ha nec'h
A gavo nerz d'hen dougen .
- 22-Miret en kreiz tud Zant Kleve, Gwerc'hez, fe
grenv ho zado : Gret ma vont dac'h gwir vugale
'Neur gerzet 'war ho roujo .
- 23-Ma chomo fur hon iaouankiz, Ar vamm 'vo stad'n'he
c'halon ; Ma teui iac'h d'ar ger 'war ho giz
'Re zo pell 'war ar mor don .
- 24-Keit a redo goad em c'halon, Keit a c'hallin
n'em stlejan, Me deui aman de ho pardon ,
Zeder, d'am mamm da ganan !
- 25-Pa n'hallin ken dont d'ho pedi, Gant ar c'hlen-
ved diskaret : C'houi 'derio da welet d'e di
Ar paour kez 'n'eus ho karet .
- 26-Ia ! C'houi 'chomo 'tal ma gwele ,
Neuze gwerc'hez 'vin dinec'h ;
Ma Mamm 'vo eno, ma ine :
Gant joa 'nijo n'he divrec'h .
- Imprimatur : Brioci, die 19a Aprilis 1913
Y.M. Le Pennec , Vic.général .
Editions d'Arvor-Guingamp)

LES SAINTS ET LES ANGES

- 1-Les Saints et les anges, En chœurs glorieux
Chantent vos louanges, O Reine des Cieux .
REFRAIN /: Ave, Ave, Ave Maria ! (Bis)
- | | |
|-------------------------|-------------------------|
| 2-Devant votre image , | Voyez vos enfants |
| Agréez l'hommage | De nos cœurs aimants . |
| 3-O vierge Marie, | A ce nom si doux |
| Mon âme ravie | Chante à vos genoux |
| 4-Vous de l'innocence | L'aimable soutien |
| Prenez la défense | Du jeune orphelin . |
| 5- Du pauvre qui pleure | Exaucez les vœux |
| A sa dernière heure | Montrez-lui les cieux . |